

Ar beleïen.

Person Ploulec'h person Loguivi
 Person Berlawene setu tri
 Personn Serwel a zo ie
 Person Perros ag abbat du Larje.
 Ken ma sinfen dan nation,
 E boutfen eur gontel en o c'halon

An otro l hostis a lavare
 Dimeus a veret berlawene
 Me vel an nation war ar c'he
 A sentureno kaer zo dreie
 Var o ven togo plumachenet
 Ag in anval deus an droug speret.

Mar karcher otro Unegan (1)
 no piye ked bed kement a poan
 Bean sinet dan nation
 ag o piche bed o pension
 bis
 a c'hwí person en Lanhuan.

Goeloc'h ve ganin kol ol vado ar bed
 Wid ma ve ma ine damnet
 Ken ma sinfen d an nation
 Me boutfe eur chontel em c'halon.

Madeleine, 8 janv. 1848.

(1). — Je lis : *Unegan* ; mais les deux premières lettres sont peu lisibles.